

AREIZH

04

JOELLE KERMOAL GAB CHEREL

PIERRETTE KERMOAL ARZEL EVEN

PREDER

Kaier 111

Gwengolo 1968

AREIZH

04

JOELLE KERMOAL GAB CHEREL

PIERRETTE KERMOAL ARZEL EVEN

PREDER

Kaier 111

Gwengolo 1968

T A O L E N N

	P.
JOELLE KERMOAL	
<u>An Irin Glas: Ar gwennili mor</u>	3
GAB CHEREL	
<u>An eilator</u>	11
PIERRETTE KERMOAL	
<u>Lennegezh wGwalarn</u>	21
ARZEL EVEN	
<u>Mennoz KERVERZIOU</u>	29
JOELLE KERMOAL	
<u>An Irin Glas: Sioulder an noz</u>	41

J O E L L E K E R M O A L

A N I R I N G L A S

A R G W E N N I L I M O R

Berradur an istor

Fin an ehanou eo, war an aod. An istor a zo istor an devezh diwezhan, pe an eurvezhioù diwezhan zoken, a dremen a-gevret ur plac'h hag ur paotr yaouank, yaouank-tre, krennarded, a-rack ma'z aio kuit ar plac'h. Graet o deus anaoudegezh an eil gent egile e derou an ehanou ; a-hed daou viz o deus krouet a-gevret ur bed dezho, a c'hoarvez eus boazioù pemdeziek.

Met n'eo ket ur bed a c'hell padout goude an ehanou, n'eo ket zoken ur bed a c'hell adkregiñ. Daoust ha ne zisoc'ho netra eus ar bed-se ? Da lavarout eo, daoust hag ez eo tonket da vervel, peogwir ne oa nemet un huñvre, pe daoust hag e vo arveret evel diazez evit krouiñ un dra nevez?

Ret eo ober un dra bennak. Ar paotr, Alan e anv, a ziviz lavarout d'ar plac'h, Tekla, e kar anezhi. An istor

a zo en diwezh istor ar strivadennoù a ra Alan evit lakaat e-barzh o bed un elfenn nevez, hag a lakaio anezhañ da darzhañ hep arvar ebet, hag a gemmo an darempredoù o deus Alan ha Tekla. Ur c'hwitadenn eo, peogwir ne fell ket da dTekla kompren, pe kentoc'h ne fell ket dezhi anzav he deus komprenet. Evit en em zifenn e laka direk Alan ar boazioù o deus kemeret a-gevret ; hag en un doare eo Alan prizoniad eus ar boazioù-se. Fellout a ra da dTekla mirout ar bed savet, daoust ma car n'eo ket ken ar mare. O daou youl zo ostourm an eil ouzh egile e-barzh ur gweledva a chom anavezet, boas, hag a zo dre-se a-du gant Tekla. Ar gudenn en diwezh a zo diskoulmet gant an amzer, diskoulmet nann : pemp eur, hag a zo eur disparti Tekla, a ziskouez ivez c'hwitadenn Alan.

Dre besurt emdroadur e tegouszhont da bemp eur. dre besurt pazennoù ?

E gwirionez n'eus emdroadur ebet. Alan a glask pemp gwech tizhout Tekla, pemp gwech e c'hwit, ha koulskoude ne gemm morse e zoare. Kregiñ a ra bewech da gomz en un doare lent-tre, o kushat ster don e soñjoù dindan stumm boutin ar frazennoù ; ne gred ket lavarout sklaer ha spis ar pezh en deus lavarout ; hag en un doare, pemp gwech ez adkrog gant an hevelep tra ; ne zeu ket a-benn da lavarout d'ar plac'h e kar anezhi hag e komz eus traoù a zo poanuis peogwir e kar ar plac'h : "Fin ar vakansoù eo", "... e oan o lavarout e kavfen hir va amzer" emezañ, e-lec'h lavarout ar pezh a soñj e gwirionez. Bewech eo heñvel emzalc'h

Tekla : mirout a ra outañ a gendarc'hel dre veur a zoare : ne respont ket a-wechoù, a-wechoù e ra van da na gompren, pe e c'hoarzh, pe e seblant bezañ dedennet gant traoù all : ar c'hranked da skouer. Hañvalout a ra kompren frazennoù ar paotr dre o ster resis hepken. Dre hec'h emzalc'h dreist-holl e vir outañ da gomz : ober a ra ar jestroù pemdeziek he deus graet a-hed daou viz : "Edo kluchet a-us d'ur poull du o furchal...evel pa vefe bet an deiz-mañ evel ar re all".

Emzalc'h Tekla a glot gant ar pezh a zo tro-dro dezhi.

An dTekla en em ziskouez evel-se a zo hepken un elfenn eus un dra hollekoc'h, ma kavomp annañ an amzer, an dud, ar boazioù, ar gweledva. Emzalc'h Tekla a glot gant kement a zo tro-dro dezhi, hag a zo a-du ganti hag a-enep da Alan.

Da gentañ ez eusan dud : an dud a zo boas da welout Alan ha Tekla evel bugale, ha bugale hepken ; gortoz a reont diganto un emzalc'h bugalel ; gwelet e vez pa lavar mamm Alan dezhañ penaos en em zerc'hel ouzh taol. Mamm Tekla a lavar d'he merc'h distreiñ da bemp eur. An holl aze a vez evel pa na zlefe c'hoarvezout netra. Emzalc'h Tekla a glot gant o kini.

Ar boazioù : evel boas, evel bemdez abaoe derou an ehanou, o deus kemeret goude ar pred an hent boas a-dreuz d'ar c'hoad evit mont da besketa ; evel bemdez e lammont diarc'hen war ar reier ; evel bemdez n'eo Tekla prederist nemet gant ar c'hranked a c'hell kavout.

An amzer a zo a-du ganti ivez : glas eo an oabl, tomm eo an amzer, n'eus netra kemmet.

Ar gweledva a chom heñvel, gwelout a reont ur vag o tremen war ar mor a zo o skediñ dindan an heol, n'eus netra kemmet.

An natur a zo a-enep Alan, a-du gant Tekla. Tekla he deus he flas e-barzh ar bed-se. Penaos e c'hallfe Alan distrujañ ar bed-se a seblant bezañ aozet ken mat ?

Traoù kemmet er vro hag e Tekla.

Ar bed a seblant bezañ aozet mat. Koulskoude e-barzh ar gweledva, an amzer, an dud zoken, ez eus arouezioù a ziskouez ez eus traoù kemmet.

Ar gwennili mor a ya kuit ; an ostaleri a zo hanter c'houllo ; n'eus ket kalz a vugale ken war an draezhenn. En diwezh ne chom eus ar bed anavezet, eus bed ar vakañsoù, nemet ar framm. Daoust d'an oabl glas, d'an amzer domm, ez eo tonket an hañv da vervel. En un doare didec'hus e teulo an diskar-amzer ; ar framm a chom zo bresk kenañ, touellus eo ivez ; ar gwennili mor a ya kuit, n'int ket touellet ; Alan kennebeut.

Daoust hag ez eo touellet Tekla ? Evel just, hi ivez a vir he framm hag a c'hoarvez eus traoù pemdeziek, met evel e-barzh an amzer, e tiskouez traoù zo n'eo ket touellet penn-da-benn. Hi ivez a verzhe ar gwennili mor o vont kuit. Merzhout a ra mat-tre emzalc'h Alan ; goulenn a ra digantañ : "Skuizh out, pesketaer huñvreoù ?" an daou c'her-se : "pesketaer huñvreoù", a ziskouez e oar Tekla ar pezh a zo en Alan. Diskouez a reont ivez moarvat n'eo eviti nemet

h huñvreoù na c'hell ket bezañ anezho ; div wech e c'houlenn digant ar paotr displegañ ar pezh en deus, ha, pa respont-eñ en un doare diresis, ne oar ket petra lavarout. Moarvat dindan an dTekla a ra an hevelep jestroù ha bemdez ez eus un dTekla all hag n'he doa ket kousket kennebeut an noz a-rack hag a zo he c'halon frailhet ivez pa soñj en dispartii. Sur eo ez eus eus ar plac'h-se enni, a-hend-all ne vefe ket denel.

Perak ne ziskouez ket muioc'h Tekla ar plac'h-se a zo enni.

Da gentañ moarvat peogwir e chom stag ouzh ar bed kozh he deus anavezet e-pad an ehanoù ; ar bed-se a zo anavezet mat-tre ganti, eñrus eo bet ennañ, aon he deus rak an traoù nevez. N'he deus ket nerzh a-walc'h, ne gred ket en dazont. Ret e vefe dezhi stourm evit krouiñ un dra nevez ; diaes e vefe, diaesoc'h eget heuliañ un dra krouet, kalz plijusoc'h ivez. Un arouez a zo en doare he deus da c'houlennata ar paotr : goulenn a ra digantañ ar pezh en deus, hepken goude bezañ miret outañ a respont dre hec'h emzalc'h : pa riskl Alan war un tamm bezhin en ur dostaat outi, e c'hoarzh, hag goude hepken e c'houlenn digantañ : "Petra edos o vont da laret?". Alan ne gompren ket ar pezh a zo gant Tekla. Ne gompren ket e kompren Tekla ar pezh a soñj-eñ ; gwelout a ra ar pezh a zo kemmet e-barzh an amzer, ar gweledva, hag all. Met ne wel ket ar pezh a zo kemmet e Tekla. Ur mennoz hepken en deus : lavarout dezhi e kar anezhi, ne soñj nemet e se. N'en deus ket ken e spered dieub a-walc'h evit d'elfennañ emzalc'h Tekla.

Daoust hag e vefe gouest d'henn ober forzh penaos ?

War zaou hent disheñvel emaint. Klask a reont kejañ, met ne zeont ket a-benn ; pep hini en diwez a zo en e gorn. Komz a reont met ket a-gevret ; ar pezh a respont Tekla da Alan a c'hallfe bezañ lavaret e meur a zegouezh. Tri zra a zo : Alan, Tekla hag ar vro. N'eus ket unan a glot gant egile. Ur wech an amzer e ra Alan ur strivadenn evit mont war linenn Tekla, met o linennoù ne gejjont ket. Loc'hañ a reont diwar an hevelep darvoud : fin ar vakañsoù hag ar pezh a dalvez se evito, met pep hini a wel se hervez e demz-spered hag ar stumm a ziskouez mat-tre pegen dispartiet int endeo an eil diouzh egile. An istor zo graet eus tammoù a zegouezh atav pe dost en hevelep urzh. Bez'ez eus da gentañ taolennadurioù eus ar vro, ar gweledva, ur frazenn eus Alan, respont Tekla hag hec'h emzalc'h. N'eus liamm ebet etrezo, teir gwech ez adkrog an hevelep tra : teir frazenn eus Alan a glask tizhout ar plac'h yaouank : "Fin ar vakansoù", "Me gred, Tekla...", "Can o vont da laret e kavfen hir va amzer", ar wech kentañ ne respont ket Tekla, an eil gwech e c'hoarzh, an trede gwech e ra van da na gompren ; ha bewech pa vez echu ar c'homzoù e vez gwelot an hevelep bag o tremen goustadik war ar mor sioul. Treiñ a reont hep mont war-raok. Dre se e vez krouet un aergelc'h poanuis : ar bed ne glot ket gant Alan ha Tekla ; dezho e vefe lakaat anezhañ da glotañ. Ne c'hellont ket stourm ouzh traoù zo : ouzh an amzer a dremen, ouzh fin ar vakañsoù ; dezho eo da gemmañ, ne c'hellont ket henn ober gant ma n'int ket a-du an eil gant egile. Daou emzalc'h disheñvel o deus dirak ar vuhez.

h uñvreoù na c'hell ket bezañ anezho ; div wech e c'houlenn digant ar paotr displegañ ar pezh en deus, ha, pa respont-eñ en un doare diresis, ne oar ket petra lavarout. Moarvat dindan an dTekla a ra an hevelep jestroù ha bemdez ez eus un dTekla all hag n'he doa ket kousket kennebeut an noz a-raok hag a zo he c'halon frailhet ivez pa soñj en disparti. Sur eo ez eus eus ar plac'h-se enni, a-hend-all ne vefe ket denel.

Perak ne ziskouez ket muioc'h Tekla ar plac'h-se a zo enni.

Da gentañ moarvat peogwir e chom stag ouzh ar bed kozh he deus anavezet e-pad an ehanoù ; ar bed-se a zo anavezet mat-tre ganti, eñrus eo bet ennañ, aon he deus rak an traoù nevez. N'he deus ket nerzh a-walc'h, ne gred ket en dazont. Ret e vefe dezhi stourm evit krouiñ un dra nevez ; diaes e vefe, diaesoc'h eget heuliañ un dra krouet, kalz plijusoc'h ivez. Un arouez a zo en doare he deus da c'houlennata ar paotr : goulenn a ra digantañ ar pezh en deus, hepken goude bezañ miret outañ a respont dre hec'h emzalc'h : pa riskl Alan war un tamm bezhin en ur dostaat outi, e c'hoarzh, hag goude hepken e c'houlenn digantañ : "Petra edos o vont da laret?". Alan ne gompren ket ar pezh a zo gant Tekla. Ne gompren ket e kompren Tekla ar pezh a soñj-eñ ; gwelout a ra ar pezh a zo kemmet e-barzh an amzer, ar gweledva, hag all. Met ne wel ket ar pezh a zo kemmet e Tekla. Ur mennoz hepken en deus : lavarout dezhi e kar anezhi, ne soñj nemet e se. N'en deus ket ken e spered dieub a-walc'h evit d'elfennañ emzalc'h Tekla.

Daoust hag e vefe gouest d'henn ober forzh penaos ?

War zaou hent disheñvel emaint. Klask a reont kejañ, met ne zeont ket a-benn ; pep hini en diwezh a zo en e gorn. Komz a reont met ket a-gevret ; ar pezh a respont Tekla da Alan a c'hallfe bezañ lavaret e meur a zegouezh. Tri zra a zo : Alan, Tekla hag ar vro. N'eus ket unan a glot gant egile. Ur wech an amzer e ra Alan ur strivadenn evit mont war linenn Tekla, met o linennoù ne gejent ket. Loc'hañ a reont diwar an hevelep darvoud : fin ar vakañsoù hag ar pezh a dalvez se evito, met pep hini a wel se hervez e demz-spered hag ar stumm a ziskouez mat-tre pegen dispartiet int endeo an eil diouzh egile. An istor zo graet eus tammoù a zegouezh atav pe dost en hevelep urzh. Bez'ez eus da gentañ taolemnadurioù eus ar vro, ar gweledva, ur frazenn eus Alan, respont Tekla hag hec'h emzalc'h. N'eus liamm ebet etrezo, teir gwech ez adkrog an hevelep tra : teir frazenn eus Alan a glask tizhout ar plac'h yaouank : "Fin ar vakansoù", "Me gred, Tekla...", "Oan o vont da laret e kavfen hir va amzer", ar wech kentañ ne respont ket Tekla, an eil gwech e c'hoarzh, an trede gwech e ra van da na gompren ; ha bewech pa vez echu ar c'homoù e vez gwelet an hevelep bag o tremen goustadik war ar mor sicoul. Treiñ a reont hep mont war-raok. Dre se e vez krouet un aergelc'h poanius : ar bed ne glot ket gant Alan ha Tekla ; dezho e vefe lakaat anezhañ da glotañ. Ne c'hellont ket stourm ouzh traoù'zo : ouzh an amzer a dremen, ouzh fin ar vakañsoù ; dezho eo da gemmañ, ne c'hellont ket henn ober gant ma n'int ket a-du an eil gant egile. Daou emzalc'h disheñvel o deus dirak ar vuhez.

Daou emzalc'h disheñvel dirak ar vuhez.

Alan a oar ez eo ret ober un dra bennak, hag a zo kalonek a-walc'h evit klask ober, daoust ma ne oar ket resis petra ober ; da nebeutañ e klask. N'eo ket touellet gant ar pezh a wel. Prest eo da zilezel ar bed kozh, daoust dezhañ bezañ plijus, anavezet, peogwir ne c'hell ket ken bezañ plijus e-pad pell. Tekla a chom stag ouzh ar bed kozh ; degemerout a ra ar pezh a c'hoarvez, hep klask lakaat an darvoudoù nevez da glotañ gant an traoù kozh peogwir ne gred ket e c'hell ober hec'h-unan he zonkadur. Gwan-tre e eo, re wan evit stourm. Mankout a ra dezhi ar spi.

Klozadur.

N'o deus ket gallet kejañ an eil ouzh egile en deiz-se. Daoust hag e c'hellint un deiz. bennak ? Se'zo hervez Alan. Tekla ne gemmo ket ; Alan kennebeut ; ne gemmo ket, nemet e vo kreñvoc'h, da lavarout eo e c'hell bezañ kreñv a-walc'h evit lakaat e-unan ar bed kozh da darzhañ. Ma laka ar bed da darzhañ e c'hell Tekla kavout he flas er bed nevez krouet gantañ. Dre Alan ha dre Alan hepken e c'hallfent kejañ, e c'hellint kejañ. An talbenn n'eo ket bet dibabet dre zegouezh : ar gwennili mor a zistro bep bloaz.

G A B C H E R E L

A N E I L L A T O R

Digoradur - kounadurioù

Diforc'het eo bet en ur gaoneadenn all ar moz arwantel diouzh ar moz arvestel, ar moz, kounit ervat, o vezañ emzalc'h an eztaoler e-keñver an argerzh.

An eztaoler an hini eo a ro da c'houzout.

Dinden an anvad hollek argerzh a-hend-all e lakaer ar c'healioù eztaolet gant ar verb : ober, bezañ, dont da vezañ, h.ç.

E daou bennrumm e ranner ar mozioù, hervez ma verkont un emzalc'h youlus, un arwant, pe un emzalc'h stadus, un arseliñ, un arvestiñ. Alese hon eus mozioù arwantel ha mozioù arvestel.

E-touez ar moziou arvestel e vo ret deomp hiziv diforc'h^{añ} daou rumm :

- ar moziou menegiñ : Glav a ra.
- ar moziou tebiñ : Mar bez glav... (1)

Ar moziou tebiñ a isranner e :

- moziou tebiñ beziadel
- moziou tebiñ erveziadel
- moziou tebiñ c'hoarveziadel
- moziou tebiñ disveziadel

Ar moz disveziadel

Ar moz tebiñ disveziadel a verk e kemer an arvester un diazez amveziadoù er faltaziadoù, kontrol d'ar beziadoù :

"Mar bize brogarourion eus Eskibion Vreizh".

E gin e verk ar moz tebiñ erveziadel e kemer an arvester un diazez amveziadoù er faltaziadoù hep daveiñ d'ar veziadelezh.

E gerioù all e verk ar moz tebiñ disveziadel un tebiñ mennet kontrol d'ar beziadoù. Div vennadenn a zo ret eta evit savelañ ar moz disveziadel :

- tebiñ
- mennañ an tebad evel kontrol d'ar veziadelezh.

N'eo ket a-walc'h e vefe an tebad kontrol ent-devoud d'ar beziadoù ; mennet kontrol e rank bezañ gant an eztaoler. Aesaet e vo an diskleriadurioù gant arver un nebeut skouerioù :

"Mar bijen Person Iliz-veur Roazhon".

(1) Ar ger tebiñ a zeu eus ar bennrann teb (Kv. DGVB FLEURIOT, p. 312) tebith e henvrezhoneg a empleg ar c'hael a vartezead.. Kv. ar c'hembraeg tyb : supposition, tybio : to suppose. ar c'herneveg tebias, tebians.

Ar veziadelezh mennet gant an eztaoler a zo anezhi : n'on ket Person an Iliz-veur. An tebad mennet kontrol dezhi a zo : lakaet e vijen Person. An div vennadenn rekis evit savelañ ar moz disveziadel hon eus amañ :

- tebiñ, eztaolet gant "mar"
- mennañ an tebad evel kontrol d'ar veziadelezh.

E gin e vefe lavaret : "Mar befe Joelle ar Pab".

Anat eo ez eo an tebad kontrol d'ar veziadelezh. Hogen kontrol ent-devoud eo hepken ; n'eo ket mennet kontrol : ur faltazi glan eo, savet en e bezh er-maez eus ar bed, ha n'eus ganin mennañ ebet d'e enebiñ ouzh ar bed boutin. Ar moz erveziadel eo a zere neuze.

Kompren a rit ez eus tu, bennozh d'an diforc'hioù-se, da eztaoliñ arlivioù skoemp a-walc'h e lavarennoù 'zo. Lakaomp e komz an aozer eus Yann, ur mezvier daonet anezhañ. Un tun lennegel e vo skrivañ "Mar befe Yann war yun disul da noz". Ur faltazi glan e c'hell bezañ en degouezh-se.

Evit gwir ez eo diaes a-wechoù gouzout pe or -eilator e -je, pe eilragor e -fe - a zere hep anaout ar gendestenn.

Eilator ha disveziadel

Reolenn diazez : An eilator a verk ar moz disveziadel.

Ar moz disveziadel a vez eztaolet bepred gant an eilator.

Un arver hanezel eo an arver-se, ha ne c'haller ket tremen heptañ hiziv an deiz.

Er grennvezh e verk c'hoazh an disveziadel en amzer-vremañ hag en amzer-dremenet.

Er rann-gh Ereg e veze arveret betek derou an 20^t kantved.

E derou an 20t kantved ez eo an eilator aet da get.

Er rannyezhoù KLT e voe an eilator arveret betek derou an 20t kantved evit merkañ ar moz disveziadel en amzer-vremañ hag en amzer-dremenet. En 20t kantved e tenn an treuzarver da aloubiñ ar rannyezhoù-se, hag e krog da vezañ kemmesket arver an eilator -je gant arver an eilragor -fe.

Hiziv ez eo aet hogos da get stlennegzh amzerel an eilator. Merkañ a ra ar moz disveziadel hepmuiken, er gomz-plaen da nebeutañ, rak barzhed 'zo a ra gant troiennoù aspadennel o reiñ d'an eilator ster un disveziadel tremened. Gwelout a raimp un nebeut skouerioù eus an troiennoù barzhoniel-se kent studiañ troiennoù ar gomz-plaen ma verk an eilator ar moz disveziadel en amzer-vremañ, en amzer-dremenet, er c'houlz-kent.

- Er varzhoniezh

Sed ur skouer tennet eus barzhonegoù Roparz HEMON:

"Ne rannit ger ; ma 'm eus lavaret tra

Na dlejen ket lavarout, va rebechit."

(Al Liamm 161 1960)

Er gomz-plaen e vije bet skrivet "n'em bije ket dleet lavarout." Merzhout a reer diouzhtu ar c'horvo a verrded hag a skañvder a c'hell ar varzhed tennañ eus hevelep arverioù henstuzel.

- Er gomz-plaen

a) An eilator hag an disveziadel en amzer-vremañ. Gant an eilator ez eus un talvoud disveziadel-bremañ :

"Hiziv eo deiz pardon bras ar piged, ha torfed e vije dezho, emezo, mankout ar pardon".

(R. HEMON An tri Boulomig kalon
sour p. 176)

O vezañ ma vez an eilator nebamzerel koulz lavaret, e roer evit reolenn bleustrek houmañ :

An eilator eeun a arverer (ha n'eo ket an eilator skorek) pa ne venner ket amzerelezh an argerzh distag diouzh amzerelezh an eztaol.

b) An eilator hag an disveziadel en amzer-dremenet. Pa venner, e gin, distag en tremened argerzh ar verb diouzh amzerelezh an eztaol, e verker ar moz disveziadel dre an eilator skorek. (1)

"Rannet e vije bet va c'halon m'am bije ar gwalleur d'he c'holl, rak petra e vijen-me deuet da vezañ war ar begad douar dianav-se. Hogen truez en devoe Doue ouzhin".

(Abrobin p. 26)

Evel evit an eilator eeun e tenn argerzh ar verb e amzerelezh diouzh ar gendestenn. Anez studiañ ar c'henarroud ne c'haller ket spisaat hag e verk an eilator un disveziadel-tremened pe un disveziadel-kent.

k) An eilator hag an disveziadel er c'houlz-kent. Emaomp o paouez gwelout e talvezo furm skorek an eilator da verkañ an tremened. Talvezout a ra ivez da verkañ ar c'houlz-kent, eleze da amzeriañ un argerzh e kentelezh un argerzh all. An argerzh all a c'hell bezañ en amzer-vremañ.

(1) Ret eo deomp amañ termenañ ar skorañ. An anv-rumm skorañ, a lakaer war ar yezhadoù diavaez, a ranner e skorverboù ha skorelloù.

Ur verb a c'hell bezañ skoret gant ur verb all:

karet on, karet em eus, karout a ran.

Pe gant stagelloù : rannigoù : a, e, ra... ra vezo meulet
araogennoù : o, war,.. war gresk.
lerc'henoù : kuit, tre... mont kuit

"Ma vijec'h em sentidigezh, n'em bije ket kollet a dud hag a armoù kement hag a gollis."

Evit gwir n'eo ket aes bepred gouzout hag e verk an eilator skorek ar c'houlz-kent pe an tremened. A-benn he gwiriañ e klasker lakaat an argerzh er beziadel keñverek :

Ne voec'h ket em sentigezh, setu perak e voe kollet kement a dud a armoù hag a gollis.

Arver an eilator

Gwelet hon eus e verke ar moz disveziadel enebadur un tebad ouzh ur beziad kontrol dezhañ.

Ar frazennoù gant an eilator a vez eta peurliesañ frammet war ur c'houblad balegenn-ategenn, eleze ur c'houblad islavarenn adverbial-pennlavarenn kevaotet, m'emañ an islavarenn arbennik-se gant ur stagell-tebif.

Hogen e kaver an eilator e lavarennoù estreget ar c'houbladoù balegenn-ategenn : en islavarennoù-keverata en islavarennoù adanvel e lavarennoù dizalc'h 'zo, hag e pennlavarennoù 'zo.

An eilator en islavarennoù-tebif kevaotet dre ma, mar, pa...

"Hep mar, emezañ, ma 'm bije gouezet evit deut ne vijen ket."

"Drezon-me ha Doue ha pa vijen e derou va yacuankiz, feal e chomjen evelkent ouzh Prederi".

Ur reolenn a-bouez ez eus o ren war arver an eilator er c'hevaotadur a c'haller envel reolenn ar valegen :

Arver an eilator en ategenn a gevampleg arver an eilator er valegenn.

Ur fazi diarvar eo bepred terriñ ar reolenn-se. Ent-strizh enta ne zlefe ket ar stagell "panave"(1) bezañ arveret e-keñver ur bennlavarenn enni un eilator, rak "be", trede elien ar stagell-se, zo eilragor ar verb bout. Reishoc'h eo neuze ober gant "pa na vije".

"Ha pa ne vije roue war Iwerzhon".

Peurliesañ koulskoude e vez ankouaet orin ar stagell, hag hec'h arverañ a reer evel ne vern pe stagell all :

"Ya, eme Brederi, ne vije tra asec'h er bed, paneve ar feur-emglev a zo etrezon ha va fobl".

An eilator en islavarennoù-keverata kevaotet gant evel pa, eget pa...

An islavarennoù-keverata a c'haller rannañ e daou rummad, hervez ma vanner ar c'heverad evel kontrol d'ar veziadelezh, pe evel un tebad na glasker ket enebif ouzh e kontrol beziat.

a) Kontrol d'ar veziadelezh ; an eilator a arverer :

(Emer a gomz ouzh Kouc'houlin)

"Ha te, astennet aze, gwashoc'h mil gwech

Eget pa vijes marv va ozhae'h paour."

(Roparz HEMON, Barzhonegoù, p.66)

(1) E meur a lec'h e kaver e-lec'h ar furm reizh ar stumm "paneve". Dre hironadur etre paneve ha nemet e tiwanas un araogenn panevet, bet degemeret er yezh lennek (Kv. Taolenn an araogennoù, in Dictionnaire breton-français, Roparz HEMON : panevedon, paedout...) "Va gwreg-me eo hi ha panevet se, ne glaskjen he dieubiñ.

b) Pa na glasker ket enebñ an tebad ouzh e gontrol beziat ez arverer en-eneb an eilragor (furm e -fe) :

"Klevout a ran ho mouezh, Adela, evel pa vefec'h em c'hichen."

(Roparz HEMON, Mari-Vergan)

Notenn : mat eo gouzout n'eo koulz lavaret nepred ur fazi arverañ an eilragor da heul evel pa.

An eilator en islavarennoù adanvel

An disveziadel a c'hell bezañ eztaolet gant islavarennoù adanvel :

"Ken marlonk e oa hag ur bleiz a vije bet war yun e-pad pemzek deiz".

(Abrohin, p. 77)

Anat avat eo e c'haller sellout ouzh ar skouer-se evel kevatal ent-stlennel d'un islavarenn-geverata.

An eilator el lavarennoù dizalc'h hag er pennlavarennoù

Bez'e c'haller kavout an disveziadel eztaolet gant lavarennoù dizalc'h ha pennlavarennoù :

"Biskoazh n'en dije gallet Bendigeidvran bezañ dalc'het en un ti."

"An daou c'hedour a oa astennet a-dreuz an trepas, ha da dec'hout e vije bet ret o direnkañ."

(An Tri Boulomig Kalon Aour
p. 41)

Anat eo e c'haller sellout ouzh al lavarennoù-se evel ategennoù, manet o balegennoù e gouzispieg :

"Biskoazh n'en dije gallet bezañ dalc'heñ" (ma vije bet e-barzh un ti.)

An eilator hag an dreistmozekaat.

Gwelet hon eus c'hoazh e c'halle ur verb bezañ skoret gant skorelloù pe gant skorverboù. E-touez ar verboù-se e c'hell meur a hini merkañ mozioù : karout, c'hoantaat, rankout, dlecut, gallout... Mozverboù a reer eus ar verboù-se hag o c'hefridi a zo mozeakaat ar verboù all.

An droienn mozverboù+verb mozeakaat a reer anezhi troienn vozek.

Amañ e sav ur gudenn. Cuzhpenn moz ar skorverb ez eo ret darc'hel kont eus moz an droienn vozek (hep komz amañ eus moz ar verb skoret.)

Me a c'hoantse mont.

moz an droienn vozek : arwandel gwan.

moz ar skorverb : diogelif beziadel.

M'am bije c'hoantaet mont.

moz an droienn vozek : arwandel gwan.

moz ar skorverb : tebiñ disveziadel.

Dont a ra neuze ar skorverb da vezañ dreistmozek.

Arveret paot a-walc'h e vez an dreistmozeakaat.

Keñveriomp an div frazenn-mañ, tennet eus an daou embannadur eus ar Bibl (e 1884 hag e 1897) gant an hevelep troer, ar Pastor AR C'ROAD :

"Yann a lavare dezhañ:N'eo ket dleet dit he c'haout evit gwreg. C'hoant en doa (Herod-ez) d'e lakaat da vervel ; mes aon en doa rak ar bobl".	"Yann a lavare dezhañ:N'eo ket permetet dit he c'haout evit gwreg. C'hoantaet en divije lakaat anezhañ d'ar marv ; mes aon en doa rak ar bobl."
1884	1897

(MAZHE, 14, 5.)

Merzhout a reer ar c'horvo a c'hell ur skrivagner tennañ eus an eil doare pe egile. Amañ ar skorverb lezet er beziadel a ziskouez muioc'h a nerzh hag a seunded ; gwisket warnañ azon an disveziadel, e laka a-wel muioc'h kildroioù, pezh a glot moarvat gant livadur temz-spered pilpous Herodez.

KLOZADUR

Goude bezañ anataet hanezadur ha peurwirioned arver an eilator, er grennevezh hag er rannyezhoù, evit ezteurel an disveziadel, hon eus diskouezet ez eo an eilator koulz lavaret nebamzerel e brezhoneg-bremañ. Arveret eo enta evit merkañ ar mozh disveziadel hepmuiken, kenkoulz an amzer-vremañ, hag an amzer-dremenet hag er c'houlz-kent.

Ouzhpenn-se e tiskouez ar studienn-mañ pegen fôrc'h-ellek ez eo arverañ an termenadurioù hengounel, "doare-divizout amzer-dremenet", pa hon eus roet skouerioù n'he deveze enno furm -je an eilator netra da welout na gant ar "doare-divizout", na gant an "amzer-dremenet".

P I E R R E T T E K E R M O A L

L E N N E G E Z H W G W A L A R N

Lennegezh wGwalarn a zo diwanet en-dro d'ar gelaouenn. Krouet eo bet Gwalarn e 1925 gant Roparz HEMON ha skrivagnerion yaouank all, da gentañ evel stagadenn lennegel da vBreiz Atao. E 1927 e teuas ar gelaouenn da vezañ distag, renet gant Roparz HEMON. Betek 1944 e teuas er-maez.

Lennegezh wGwalarn a verk ur mareveah neuze, hogen ledanoc'h eget buhez ar gelaouenn hec'h-unan, rak bremañ c'hoazh ez eus skrivagnerion a zo tud wGwalarn e gwirionez, panave nemet Roparz HEMON ha Maodez GLANNDOUR. Ha buan e verzher ez eus bet e-kichen luskad Gwalarn skrivagnerion a oa er-maez anezhañ, evel Yeun AR GOW da akouer, zoken ma kenlabourent gant ar gelaouenn. A-walc'h eo lenn o ober-ennoù evit kompren ne oant ket awenet gant "avel wGwalarn". Ouzhpenn ur marevezh, e verk lennegezh wGwalarn ur spered.

Evit ar wech kentañ en hol lennegezh e weler ul luskad gwirion ; ur strollad skrivagnerion douget gant an hevelep youl : krouiñ ul lennegezh vrezhonek uhel, arnevez, emsavel ha ster dre ret, enebet ouzh al lennegezh diwadet ha diamzeriet he doa anavezet hor bro e-pad re bell. N'eo ket moarvat e oant mennet da zisteurel pe da zismegañsiñ den. Nac'hañ a raent hepken mont war roudoù BRIZEUX pe zoken KERVARKER, evit mont kentoc'h gant hent a oa bet boulc'het gant Meven MORDIERN.

Ne venegin ket amañ holl skrivagnerion wGwalarn, hag oberenn glok pep hini anezho (sellout ouzh Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ gant ABROZEN.) E-touez ar re bouezusañ e c'haller menegiñ er strollad kentañ Roparz HEMON, Youenn DREZEN, ABROZEN, KERVERZIOU, Jakez RIOU. Diwezhatoc'h e teuas un eil strollad amañ KEAVENN, KERVELLA, LANGLEIZ, Roparz AR MATEON, GAWAIN, Maodez GLANNDOUR.

Dre studiañ o oberennoù e c'haller gwelout o mennadoù ha kompren ster don lennegezh wGwalarn.

An distro d'an andon geltiek

Skrivagnerion wGwalarn a felle dezho krouiñ, hogen ne oa ket diwar netra. En tu-hont d'an traoù a lakeant en arvar e oa ret dezho kavout traoù diogel evit kemer diazez warno. An eeunañ hag ar reishañ a oa klask hag adkavout tremened ar Gelted, pe da nebeutañ o mojennoù.

Setu perak e weler ken puilh e Gwalarn troidigezhioù eus an istorioù kozh-se da skouer Darmuid ha Graine, troet gant Roparz HEMON. Ar pal a oa evito perc'hennañ kement-se, ha lakeañ ar Vrezhoneg da anavezout ar pezh a oa dezho en

diwezhañ, kement ha Iwerzhoniz o doa gouezet int mirout ar vojennouriezh keltiek. An hevelep damant a ziskouez ABROZEN o treiñ ar Mabinogi.

Hogen ne oa ket tud wGwalarn troerion hepken. A-boan dizoloet ganto an andon geltiek ez int set pelloc'h. Adkavout a oa mat, hogen krouiñ war un dro a oa gwelloc'h. Hag e welomp en doare-se LANGLEIZ o reiñ un troadur eus Tristan hag Izold. KERVERZIOU diouz e du a sav barahonegoù ma vev enno Kelted wechall gant o boazioù, o hengounioù, o c'hravez. Anat eo e kendalc'h aze war lañs Meven MORDIERN er Sketla Segobrani.

Gwelout a reer skrivagnerion o vont pelloc'h c'hoazh. Ar vojennouriezh keltiek a gemeront evel danvez ; d'ar mojennoù hengounel e roont ur ster nevez e-keñver o buhez dezho : Roparz HEMON e Lazhadenn Unvab Aife pe e Gwarizi vras Emer.

Kement-se a ziskouez meur a dra. Skrivagnerion wGwalarn o deus komprenet o doa da adkavout o-unan ar pezh a oa dezho, da zegas an dra-se d'o c'henvroiz. Anat eo n'eo ket vojennouriezh ar C'hresianed, ken dedennus e vefe, he deus un dra bennak da welout ganeomp, hogen hini ar Gelted, ken dedennus ha skedus ha forzh pehini a-hend-all. Met den a-rack tud wGwalarn n'en doa kredet henn lavarout, na marteze henn soñjal. Dizoleiñ an andon geltiek ha dreist-holl he meizañ evel tra vev a oa nevez. Talvezout a ra evit an den kement hag adkavout tremened pellañ e vob hag e anzav evel e hini ; en diwezhañ eo endeo en em leo'hiañ er bed.

Adkavout Breizh

N'eo ket dre zegouezh en deus rener Gwalarn roet da unan eus e levrioù evel talbenn Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh. Un arouez eus ar mare eo, eus ar pezh eo bet lennegezh wGwalarn. Un dremm all anezhi a spurmantomp neuze dre oberennoù evel pezh-c'hoari Jakez RIOU, Nomenoc, Ce !, ma laka ar skrivagner da anavezout un darvoud eus istor Breizh, emgann Balon, ha ma tiskouez dre emzalc'h gwirheñvel Breizhiz an amzer-hont hini e genvroiz en e vare.

War un dro e tiskouez skrivagnerion wGalarn ar youl da adkavout pinvidigezh speredel Breizh, bet ankounac'haet gant Breizhiz o-unan. E Skiant Vreizh e klask GAWAIN, etre traoù all, kompren ster mojennoù 'zo, hini ar Gleuzeur Santel da skouer. Gwelout a reer aze an diforc'h a zo etre lennegezh wGwalarn hag ar pezh a oa a-raok, en 19th kantved pergen. Pa chom KERVARKER o tastum mojennoù a rede c'hoazh war ar maezioù en e amzer, an darn vuiañ anezho digomprenus evit an dud o anavezze, ez a GAWAIN kalz pelloc'h. KERVAKER en e-gichen a hañval bezañ un arvester douget gant ar c'hiz romantel. GAWAIN a glask mont e don an traoù. An diforc'h etrezo en diwezh a zo un diforc'h a spered. GAWAIN a fell dezhañ sammañ tremened e vro, KERVARKER a ra ur renabl eus an dismantrou a chom c'hoazh eus an tremened-se.

Met tud wGalarn ne vevent ket en tremened. Sellet o deus ouzh Breizh gant o daoulagad a Vreizhiz eus an 20th kantved. Breizh o amzer a weler o vevañ e skridoù evel Merc'hed Brest gant MEAVENN, danevelloù 'zo eus Roparz HEMON,

Evit ket ha netra gant Roperzh ar MASON, Geotenn ar Merc'hez gant Jakez RIOU, Itron Varia Garmez gant Youenn DROZEN. Sonjal a ran dreist-holl en oberenn diwezhañ meneget, ma welomp enni Breizhiz en ec'hwel oc'h en emgannañ diouzh ret gant ar warded war warc'h. Pell emeomp amañ diouzh skeudenn hengounel ar Vrezhoned, barzhed holl, douget d'an huñvre, hael h.a., degaset gant ar romantelezh c'hall ha maget gant Breizhiz c'hallekaet, panave nemet CHATEAUBRIAND, RENAN, pe c'hoazh Gallacoued evel Pierre LOTI, rak evitañ hag e lennerion Gaud hag he martolod a oa ken estren da ved sevenet ar Gornog ha Madame Chrysanthème. A zo gwashoc'h, ar skeudenn-se a oa bet degemeret gant skrivagnerion vrezhonek, BRIZRUX da skouer. Hogen ne c'halle ket Breizhiz en em adkavout er skeudenn-se. Lennegezh wGwalarn a nac'h a-grenn asantin d'ar mojennoù gros-se. Diskar a ra ar patromoù faos, o tiogeliñ eo da Vreizhiz o-unan da lavarout ar pezh ez int. Dezh eo d'en em anavezout, ha da embann goude-se dirak ar bed a-bezh ar pezh o devo kavet. Arouezius eo gwelout Maodez GLANNDCUR en hevelep mare o klask termenañ an den brezhon skouer e Dremm ar Speredegezh vrezhon.

En em adkavout evel Breizhad.

Lavaret em eus bremaik "en em anavezout", evel Breizhad evel just. An holl emzalc'hioù am eus klasket termenañ a zo e gwirionez diazezet war an dra-se. Ne vezer ket souezhet neuze o kavout e lennegezh wGwalarn kemeni-all a skridoù o tiskouez an den dirak kudennoù brasañ ar vuhez, bet pleustret

en holl lennegezhioù ar bed. An den dirak ar c'halvidigezh en Iram gant Maodez GLANNDOUR, pe Mari Vorgan gant Roparz HEMON ; anken an den e-keñver un uhelvennad a dec'h dirazañ en ur gontadenn gant KERVELLA, Gant blaz an avaloù ruz ; pe ceunoc'h, ar garantez, hag an trivliadoù densl diazeze e Levenez pe Ezvezañs gant GWAIN. Perak adkemer dodennoù peuranavezet, a c'haller goulenn. Hepken peogwir ez eo ret da bep den, da bep pobl, ober an hent a zo bet graet marteze gant ar re all a-rack. Skrivagnerion wGwalarn, adkavet ganto o fersonlezh a Vreizhiz, o doa da grouiñ patromoù sevenadurel evit ar remziadoù da zont.

Anavezout ar bed

En Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh e lavar Roparz HEMON ez eo ret mont davet ar bed hag e anavezout, hogen ur wech distrujet ar skramm ez eo Bro-C'hall evit Breizhiz. Pennad kentañ al levr-se a zo Tagore ha diskar ar C'huzh-Heol, an eil Breizh hag ar bed. N'eus ket arouez splannoc'h eus ar pezh a zo bet lennegezh wGwalarn, an nor digor war ar bed, holl deñzorioù ar bed a-bezh diraezus evit ar Vrezhoned (sl. ouzh Maodez GLANNDOUR, Barzhoniezh maread Gwalarn, Al Liamm niv. 124). Neur a zoare o deus kemeret skrivagnerion wGwalarn evit anavezout ar bed hag e binvidigezh, an hini kentañ o vezañ moarvat skrivañ pennadoù evel ar re meneget a-us a ziskoueze ur sell brezhon war ar bed.

Un eil doare a voe treiñ obarennoù japanek, gresianek, saoznek, alamanek, h.a. eleze reiñ da Vreizhiz an dro da anavezout pennoberennoù al lennegezhioù koshañ hag al lenn-

egezhioù kempredel en o yezh. En ur ger, reiñ dezho un tu da berc'hennañ anezho, ha da ziraez dre-se an hollvedelezh.

Lennegezh wGwalarn en diwezh he deus krouet ur sevenadur gwirion, breizhat, ha dre-se digor. Ar goulenn a c'haller ober neuze a zo perak ez eus bet eus al lennegezh-se er mare-se. Ret eo he c'hompren evel arouez ur vuhez nevez o tiwanañ e Breizh, ha da gentañ en Emsav. Biogeliñ a ra e fell da Vreizhiz, evit ar wech kentañ goude kantvedoù a zigasted hag a hun, sammañ o fersonlezh a Vreizhiz ha kemer perzh er bed ; ha kement-se • pellaat diouzh ar vrizh lennegezh a c'hane gwerzioù melkonius, a c'halle bezañ brav, hogen a nac'he ar bed muioç'h eget ~~la~~ glaskent e anavezout.

En diwezh e verk lennegezh wGwalarn dihun ur pobl.

ARZEL EVEN

MENNOZ KERVERZIOU

Vuejo-nous la Fouëscio
Pêr canta tout ço que viéu,
Car es, elo, l'Ambrousio
Que tremudo l'ome en diéu.

Marteze ez eo iskis deraouiñ ur gentel war ur barzh
brezhonek gant un arroudeñn brovañsek. Daou abeg am boa
evit henn ober :

Bevet en deus KERVERZIOU e Provañs ha levezonet don
eo bet gant ar vro-se, gant he zud ha gant he lennegezh.
Eñ eo a-dra-sur an nebeutañ "norzhsek" eus hor barzhed -
ha perak henn rebech dezhañ ? "Norzheien" eo ar Gelted
dre o orin, marteze (ha c'hoazh) ; hogen n'int ket bet
bepred enket evel hiziv en un nebeut inizi ha gourinzi
morennek e Gwalarn Europa ; piacuet o deus aodoù bleun-
iacuek Provañs, traoniennoù strujus ar Po hag an Danav,
uhelgompezennoù kras Hispania ha Galatia.

Hogen donoc'h abeg am boa ivez. Ar gwerzennoù-se,
tennet diwar La Coupe Santo gant MISTRAU, hag a zo deut
da vezañ kan broadel Okitania, a estaol mat ar mennoz
a oa hini KERVERZIOU diwar-benn natur ha kefridi ar Varzh-
oniezh : "Skuilh dimp ar Varzhoniezh - Evit kanañ kement

tra zo - Rak hi eo an dieñ hud - A dreuzkemm an den e doue".
 KERVERZIOU a oa, evel ma lavare e-unan dre fent, "barzh
 ha chimist" ; met ret-mat eo empennañ na oa ket ennañ ur
 barzh hag ur c'himiour o werediñ pep hini diouzh e du hag
 evitañ e-unan. Meizet en doa ar wirionez ankounac'haet gant
 hon amzer : n'eus ket a arz gwirion anez e vefe anaoudegezh ;
 n'eus ket a ouiziegezh wirion ha na vefe ket ivez krouidigezh,
 poiésis. Pal ar varzhoniezh n'eo ket hepken deskrivañ kaer-
 derioù ar bed ha disammañ kalon an den, hogen anavezout ar
 bed en ur zreveziñ, naren ar grouidigezh hec'h-unan, ar
 pezh zo fazi lukiferel ar mennoz modern, hogen ar gwered-
 krouiñ. Ha palavaran "barzhoniezh" e tlefen e gwirionez
 lavarout "arz" ; hag "arz" a endalc'h "micher" : ar vicher
 sevenet ervat ha gant "reizhrat" a zo skeudenn ar gwered
 doueel, ar grouidigezh, hag un hent davet ar pervezhded.
 Ha KERVERZIOU a oa ivez un artizan en e zoare, ampart-
 meurbet gant e zaouarn, ha difennour an artizanéd.

Evel ma c'hoarvez alies, n'eo nemet diwezhat
 a-walc'h ez eo deut KERVERZIOU da veizañ sklaer ha klok
 ar mennoz-se, hogen a-viskoazh en deus graet dioutañ
 en-dic'houzvez pe zamzic'houzvez. Zoken e varzhonegoù
 yaouankiz, strollet en e Varzhaz dindan an talbenn
Yaouankiz divorc'hed, n'int ket ken "divorc'hed"se. En
 aner e klaskfed enno ar sensuallegezh pagan hag eürus a
 gaver e barzhonegoù Youenn DREZEN, ha kennebeut balc'hder
 c'hwerv, "byronek" Roparz HEMON. Ar barzh yaouank a sent
 alies ouzh lezenn ar c'hig, hogen gouzout a oar, evel
 BAUDELAIRE, ez eo trist ar c'hig :

"Pe c'hour a lavaro divezh tristez e wreg
 war-lerc'h trelled un noz-hed orgedus ?
 Re gar-e-unan eo mabden, avat, -ha balc'h,
 ur bam !"
 (Skrivsonerezh, 1930)

Ha dezhañ bezañ bet lakaet en ur rann all eus al levr,
 eus an hevelep mare eo An Dir-servij, unan eus pennober-
 ennoù ar varzhoniezh relijiel. Högzik en deroù e tispleg
 dimp feiz varzhoniel KERVERZIOU :

Dre m'Oc'h Barzhoniezh, Doue, ha n'eus Nemedoc'h
 a gement a vije Andon Awen, Andon Anao.

(Menegiñ a ran diwar ar Barzhaz klok, hogen en destenn
 gentañ embannet war wGwalarn ez eo un tammig disheñvel, ha
 marteze nerzhuc'h :

Dre m'Oc'h barzhoniezh, Doue, ha Nemedoc'h.)

Ar varzhoneg kaer-se a c'hellomp kemer da ardamez ar
 marevezh kentañ e mennoz KERVERZIOU, marevezh ar Gristeniezh.
 Bremañ eo ret din ober un evezhiadenn. N'ouzon ket pe
 vennoziou relijiel pe filozofel a vag pep hini ac'hnoc'h
 Marteze ez eus en ho touez katoliked ha Kristenien eus
 ilizoù all, Paganed er ster mat hag er ster fall hag
 agnostiked. Ne vern. Evit kompren ha tañva Victor HUGO
 eo ret ober van da grediñ en e vitologiezh souezhus, laik
 ha republikan ; evit meizañ ha tañva KERVERZIOU eo ret
 asantiñ - evit ur pennadig ha pa ne ve ken - d'ar mennoziou
 a oa e re d'an ampoent, Kristeniezh, Drouiziezh pe unded
 ar c'hredennoù.

Ar marevezh kentañ a bad mui pe vui betek ar brezel.
 N'eo ket unvan avat. E-kichen pezhioù leun a feiz evel
Distro, Rinenn XX, Arouez, Pedenn - darn anezho dellezek
 eus Maodez GLANNOUR - en deus kendrec'het barzhonegoù
 erotek : Da nesañ a gari ; C'hoant ; Marvnañ ; Tra nebeut ;
Loargann (d'adus-meurbet hemañ gant e ster "daouk" ;
Gwall genedik (d'imbann dre urzh) ; hag arabat disoñjal ez

eo neuze ivez e voe savet Llena Davies, n'eus ket bet lakaet ugent vloaz d'ê skrivañ, daoust d'ar vojenn. Hogen daou bezh (bloaziet 1939 o daou) a zo pouezus-dreist evit danvez hor c'hentel. An hini kentañ, Goursav, a ragembann en un doare souezhus kenderc'hiadoù donañ an trede marevezh, ha ret eo e blaenañ un tammig. An talbenn e-unan a zo ar skouer kentañ eus ar pezh a gaver aliesik en trede marevezh, ar c'hoari-gerioù barzhoniell ha prederouriel, heñvel a-walc'h ouzh nirukta an Hindoued (anavezet-mat e oa ivez gant Heniverzhoniz). Goursav a dalv extasis, met komz a reer ivez eus "goursav an Heol", hag an daou ster-se a dalv war un dro amañ. Goursav an Heol - kreisteiz ar bloaz ; "kreisteiz" an deiz ivez, ha kreisteiz buhez ar barzh (31 e oa) - hag ar C'hreisteiz douaroniel, ur c'hoari-gerioù all ! Erru e-kreiz pep tra, e-kreiz amzer hag egor, en em veuz ar barzh er "Goulou gwenn", arouez ar Feurvoud, "kanevedennet" gant e vezoud-eñ evel goulou an Heol gant ar gwer-c'henn (merzit, en ur dremen, e ampartiz da implijout ur skeudenn ouiziegezhel - gouezoniezhel, evit bezañ resisoc'h - hep tamm pedanterezh ; un dra aesoc'h • brezhoneg eget e galleg, gwir eo).

Ur varzhoneg all hag a roan ur pouezuster abennik dezhi eo Stered an noz. Iskisat tra : an dornskrid (ket an hini am eus implijet evit embannadur ar Barzhaz, hogen an hini koshañ, bet implijet gant KERVERZIOU evit embannadur Ur strobard barzhonegoù war SAV) ez eus ur poz ouzhpenn :

" Vit hor silvidigezh, palal,
e savas du-se, er Reter,
un Den-Doue, a-greiz ar c'hoaperien.
Piv 'vat 'anvo'n touelledigezhioù
o do an dud savet war hent at gwelladur ?"

Diverket eo ar poz-se gant barrennoù, ha n'eo ket bet embannet war SAV na lakaet en-dro en dornskrid ne uarietur. Perak ? Dre ma sante dija ar barzh keuz da b-Fan ha da d-Teutatis, hag an damc'hoanag na oant ket peurvarv marteze ?

Bloavezhioù kentañ ar brezel a verk un dro-bleg en emdrouerezh mennoz KERVERZIOU. A-viskoazh e oa bet dedennet gant ar pezh a anver "skiantoù kuzh", ha dreist-holl gant ar steredouriezh, ma oa barrek-tre warni ez-pleustrek hag ivez e savboent darempred ar steredouriezh gant ar vitologiezh (unan eus e levrioù boas a oa Les astres et la destinée gant Philip METMAN). Diouzh an tu all e studie muioc'h-mui istor, yezh ha kredenn an Hengelted, ha kalz a bouez a roe d'en Notennoù ha d'ar Sketla ; desket en doa ivez ar c'hembraeg ha graet anaoudegezh gant ar Barddas (a zo an "Triadoù" al lodenn bouezusañ anezhañ). Kement-se, moarvat, a voe abeg dezhañ klask ur speredegezh nevez ; rak, ret eo pouezañ war ar poent-se, n'eo ket Epona da vezañ lakaet e kemm gant Kan da Gornog, na Fedenn Gouc'houlinn gant Gwarizi vras Emer ; barzhonegoù "relijiel" int kenkoulz hag An diri-servij, ha gwir eo kement-se eus an holl varzhonegoù a ya d'ober al lodenn talbennet Mojennoù keltiek (nemet unan, Fedelm, skrivet e-pad ar marevezh kentañ ha lakaet eno evit he danvez hepken). Un nebeut barzhonegoù, Heklev ha Dassoñ, a ra evel ur pont etre an daou varevezh, hini an An diri-servij hag hini Manos ha Bena, Preder anhuñ 1941), skrivet pa zamwele ar barzh

"biz kannad an Usved o skrivañ ouzh ar vur
kan ar beurñadelezh az kalv : arouestlet out !"

D'am c'henyoul dianav (1941) ha Furnez (1943) a zo barzhonegoù prederouriel kentoc'h eget relijiel, ma santer warno levezon Roparz HEMON (Furnez evit gwir a zo diwar-benn Roparz HEMON ha kenniget dezhañ). Gant Frehel (1942) ha Mae dy lygaid yn las (1944) e tistroer d'an erotegezh empennel a weled e Gwall genidik, met e Lidkinnigoù (1944, hag awenet gant an hevelep plac'h ha Mae dy lygaid yn las) ez eo unanet karantez gant mitologiezh kelt ha steredouriezh :

- "Trema karbed Arzhur o sevel, ha Vega gwelevus-dreist en he goanag pennahel 'vo,
- kinnig da Vamm hon Doueed hor memad glan.
-
- deus, karet, tro ouzh ar C'hi hollskedus,
- kinnig da Vamm Gedern Geltia hor c'hentañ pok".

(e gwirionez, savet e voe ar varzhoneg-se goude Epona ha Nemeton).

Barzhonegoù ar marevezh drouiziek a zellezfe ur studi hir, hiroc'h kalz eget ar pezh a c'hellan reiñ deoc'h hiziv. Unan anezho, Nemeton, a zo bet plaenaet e kentelioù SADED (a-gevret gant un damskeud eus istor an "nevez-drouiziezh"). Lavarout a rin un nebeut gerioù diwar-benn Manos ha Bena - un nebeut gerioù hepken, rak ar varzhoneg-se a zo evel klimax ar marevezh drouiziek, a rankfed gouestlañ dezhi ur gentel pe ur pennad a-bezh. He c'hened dreist zo anat d'an holl, ha n'eo ket evel oberenn arzel e komzin anezhi ; ya evel oberenn veizel. Kinniget eo PENNOTARANV, eleze "da bPendaran" - an anv a

gemere Roparz HEMON pa skrive pennadoù bruderezh e galleg war Arvor - hag awenet gant ar Sketla. Al levr-se a ra Manos ha Bena ("gwaz ha maouez") eus ar c'houblad denel kentañ mab ha merc'h Belios, doue ar Marv (an hini a anver Dis Atir "an Ankou-Tad", hag ivez -hervez KERVERZIOU da vihanañ - Teutatis "Tad an Dud") hag Adaqi merc'h Noux, doueez pe gentoc'h ramzez an Noz. Mibien an Noz hag an Ankou eo enta ar Gelted ; n'eo ket faltazi-rik kement-se ; diazezet eo war ar pezh a lavar Caesar, ha war ar boaz kelt da zeraouiñ an deiz, ar miz hag ar bloaz gant ar "marevezh teñval": kuzh-heol, digresk al Loar, diskar-amzer. Merzit an tri daouad gerioù implijet evit envel Manos ha Bena. "Den ha benenn" : gerioù hollek, oc'h eztaoliñ hepken o anien denel gourenebet ouzh an natur isdenel :

- "Den ha benenn, o-unan er bed bras doujet gant plant ha loened e kreskjont".
- "Gour ha gwreg" : henvelster, hogen gant ar pouez war ar revelezh, skeudenn gorfel an daouegezh Hanvoud-Derc'hvoud.
- "Mav ha maouez" : ar gerioù-se, ez deveradurel, a dalv "mevel" ha "matezh", hag a estaal sujidigezh ar c'houblad denel d'o Zad doueal :
- "krouet evit azeul Bleiz Meur ar C'hornaoueg, doue o zud....."
- Klevet em eus KERVERZIOU ur wech, e 1943, o komz eus ar varzhoneg-se a oa neuze war ar stern gantañ, hag o lavarout (gant galegerien e oamp) e oa "l'interprétation celtique du péché originel". Hag anat eo e heuilh dre vras mojenn yuzev-kristen ar C'hrouezh (zoken an "naer" hag an "arc'hael" zo meneget, daoust hag evel skeudennoù hepken) ;

arzel even

arzel even

arabat koulskoude gwelout e kement-se un drevezadur di-zoujañs. E pep kredenn e kaver mojennoù heñvel oc'h estaolañ ar "pecthed orin" pe ar "gwall genidik", ha war un dro em-ziskouezadur ar rev, pe da vihanañ emouiziegezh ar rev, torridigezh an unded kent : mojenn androgune PLATON, lakaet da dalvezout en un doare espar gant ul lenneg brezhonek all, Tangi MALMANCHE (An Antekrist).

Bez' e c'haller lavarout e voe kemmet-holl ar mennoz nevezdrouiziek pa zeuas Kerverziou dezhañ. Tuat e oa an "nevezdrouiziek", betekhem, da chom dindan levezon Iolo MORGANNWG (gwelet peurliesañ a-dreuz berrdroidigezh c'hallek Paul LADMIRAULT ; gwelout a raent en Triadoù kembraek un heklev eus kelennadurezh uhel ha glan an Drouized, tra ma sellent ouzh ar vitologiezh kelt evel ur bern brizhkredennoù miret gant ar bobl vunut "rak ariek". KERVERZIOU a oa kalz ec'honoc'h e ouiziegezh, hag e wele gant reizh (dindan levezon DUMEZIL dreist-holl) er vitologiezh-se (indezeuropek-rik pe dost, ha tamm ebet "rak-ariek") hag en holl vitologiezhoù un doare da gelenn dre arouezioù gwirionezoù ha n'hellont ket bezañ displeget dre gomzoù reizhpellek. Ne zinac'he ket ar Barddas avat, a anavezze kalz gwelloc'h eget e geneiled, barrek ha ma oa d'e lenn er skrid kembraek ; sellout a ras outañ, toutes proportions gardées, evel o terc'hel an hevelep lec'h e-keñver ar vitologiezh kelt hag ar mojennoù keltiek hag an Upanishad e-keñver henvojennoù ha mitologiezh an Hindoued. Manos ha Bena a zalc'h roud eus ar sinkretiezh-se. Ouzhpenn ar Sketla (o-unan ul levr "sinkretiek" a-walc'h); e tenn elfennoù - munudoù da vihanañ - diwar henvojennoù Iverzhon

an-ahv' Lir'; Manos o tantañ e viz-meud evit kavout gouiziegezh, evel ma ra Find; an daveadenn da "oaz, son ha prezni"), ha diwar hengoun barzhed Kembre (ar gerioù Ior ha Gwenva). Merzhout ivez ez eo bet "predenek-aet" Adagi en Adapi, hep abeg mat, rak ma 'z eus ur ger heniwerzhonek adagi, noz, n'eus ger predenek ebet kenglot gantañ. An hevelep sinkretiezh a verzher er varzhoneg diwezhañ skrivet gant KERVERZIOU, Pedenn Gouc'houlin, a zellezfe ivez ur studiadenn hir evel "eilger" da Manos ha Bena: haroz meur Iverzhon a veneg ul lavarenn tennet diouzh ar Mabinogion ("A vo penn bezet pont") hag a zave d' "An Hini a beder" -Guton ar Sketla; seurt eklektelezh a lakafe moarvat ur c'heltiegour akademek da skrifañ, pegen reizh bennak eo ez-varzhoniel hag ez-speredal ivez.

Hogen mui-ouzh-mui e teue KERVERZIOU da sellout ouzh Kristeniezh, Drouiziezh hag an holl relijionoù, kredennoù pe hengounioù all evel talbennoù ur biramidenn o kenrediek davet an Unded veur. Feurc'hounezet e oa d'ar mennoziou estaolet e skridoù René GUENON hag e ziskibien evel Frithjof SCHON (oberour De l'unité transcendante des religions). Diwir eo lavarout koulskoude e oa "deust en-dro da vezañ undoueelor", rak biskoah n'en doa paouezet a vezañ; arabat kemmeskañ "mitologiezh" ha "liesdoucegezh", ha n'eus bet biskoazh a "liesdouceourien" wirion nemet hiniennoù e vije.

Boas e oa KERVERZIOU da lavarout e oa ar Gristeniezh relijion ar Mab hag an Drouiziezh relijion ar Vamm. Pe wir eo an dra-se pe n'eo ket, sklaer eo en doa un azacuz arbennik ouzh ar "Vamm Veur" -pe gentoc'h, evel ma lavare, ar "Voer Veur", o tasorc'hiñ ur ger kollet gant ar yezhoù

predenn abaoe daou vil vloaz pe ouzhpenn. Ul lusk-natur e oa ennañ moarvat, met kadarnete voe gant teirlevezon. Da gentañ, pennad Ch. CHASSE, Sainte Anne et les Vierges noires, embannet war Annales de Bretagne e 1947, hag a ziskouez e treuzvev doueez veur ar Gelted, Ana pe Dana, mamm an doueed, dindan stumm Santez Anna (evel ma treuzvev en Iverzhon dindan stumm Santez Brec'hed), hag ez eo bet kemmesket Santez Anna gant ar "Werc'hez Du", anavezet e pep bro europat evel stumm kristenaet an Doueez Veur. D'an eil, ar gweladennoù a rae aliesik da Chartrez, nevedenn-greiz ar C'halianed gwechall, ha dreist-holl d'ar c'hev dindan an iliz ma keheler delwenn ar Werc'hez enskrivet war ar sichenn anezhi Virgini pariturae (Druides) ; met n'eo ket hepken ar Werc'hez Vari a geheler e Chartrez ; ouzh talbenn kreisteiz an iliz-veur ez eus un delwenn eus Santez Anna, skeudennet evel ur vacuez yaouank (n'eo ket ur vamm-gozh) o terc'helen he daouarn ul lestr hag ur rozenn. Da drede, diwar lenn DUWIZIL ha GUENON e oa deut KERVERZIOU da gemer dudi bras en Hindouelezh "Drouiziezh ar Reter" , ha d'he studiañ aketus. Dameuc'het eo al levezonioù-se e barzhonegoù an eizhvet lodenn, Klod ar Vamm, dezhi un epigrafenn sañskritek, Vande Mataram "Kevarc'h, a Vamm", hag a zo war un dro ur verrbedenn hag ul lugan broadelour (ar pep heñvelañ e brezhoneg a vije marteze ar bedenn da Santez Anna : O mater patriae, Anna potentissima, Britonum tuorum salus esto. N'eo ket ret lavarout, evel just, ez eo d'ar mare-se e voe staget ouzh gwerzenn 144 An Dirî-servij ar verrbedenn sañskritek Cantih, cantih : "peoc'h"). Savet e voe Gouestl ha Goulenn goude ur weladenn da Chartrez, ha nebeut goude e voe savet

ivez Salve Regina (kinniget da L(oeiz) ar F(loc'h), Maodez GLANNDOUR), a c'haller lavarout ez eo ur bedenn gristen ha drouiziek war un dro : anat eo ez eo ar poz kentañ un damdroidigezh eus Salve Regina an Iliz, gant anv Bena o kemer lec'h hini Eva. N'hon eus ket amzer da blaenat ar pezhioù all, met n'haller ket tremen hep estlammiñ ouzh kaerder ar genganez e Delioù-bleuñv hag Om.

Er rann da heul avat, Moulerezh, eo e welomp ar sklaerañ KERVERZIOU o trein eus an Drouiziezh pur d'ur gredenn hollek. Edo KERVERZIOU neuze o labourat e ti Oberthür, ha ma oa dedennet-dreist gant ar moulerezh evel arz-ha micher en doa kas ouzh al labour melestradurel tenn ha dizudi en doa d'ober en ti-se. Klask a reas koulskoude lakat al labour-se da dalvezout da bazenn davet ar gwellaat speredel ; ha sed talvoudegezh Dor an Nec'h, ma weler an nirukta brezhonek o c'hoari. Dont a reas dezhañ en un taol, goude prederiañ war ster an anv Ober-Thür "dor an nec'h" - hogen daou ster zo gant "nec'h" e brezhoneg ! Ne vern pegen dister pe dizudi al labour, pa vez graet gant reizhvat eo ur skor d'an arakaat speredel, ha "dor an nec'h", an nor ma tremen ar barzh drezi pep beure o vont d'e labour kasaus, a zeu da vezañ evitañ "dor an Nec'h", Ianua Caeli. Ar varzhoneg diwezhañ, Steuennol, n'eo ket sklaer he darempred gant ar moulerezh, hogen testamant ar redel KERVERZIOU eo, en un doare. Ar "groaz hollvedel meur" azeulet amañ n'eo ket, pe gentoc'h n'eo ket hepken hini ar C'hrist, hogen an arouez usvedoniel kavet en holl hengounioù ; awenet e voe ar pezh-barzhoniezh-se gant levr GUENON, Le Symbolisme de la Croix (hag ez-leal, e-touez paperioù KERVERZIOU ez eus un droidigezh anezhañ

e gwerzennoù gallek, kinniget "A. M. René Guénon").

Trede marevezh KERVERZIOU n'en deus kenderc'h het nemet barzhonegoù berr -lod anezho pennoberennoù, gwir eo. Pa voe skoet gant ar marv -"galvet en-dro", evel ma vourre o lavarout -edo o prientiñ ur varzhoneg hir hag a vije bet par d'e varzhonegoù hir all, ha moarvat perveshoc'h c'hoazh e-keñver stumm ha dreist-holl kenganez. Itron Vrekilien a dlee bezañ talbenn ar varzhoneg-se. En e benn hepken e oa moarvat, rak netra n'eus bet kavet en e baperennoù.

Ar skridoù en deus lezet, avat, a zo trawalc'h hag ouzhpenn da reiñ dezhañ ur renk e-touez ar re gentañ. E-pad e vuhez ez eo bet meizet ha tañvaet ervat e varzhoniezh gant nebeut-tre a dud, mignoned personel peurliesañ ; hogen anat eo e levezon war veur a hini eus hor skrivagnerien yaouank, ha da grediñ ez eus e kresko al levezon-se.

J O E L L I E K E R M O A L

A N I R I N G L A S

S I O U L D E R A N N O Z

Ar gontadenn verr Siculder an noz, a gaver e-barzh An Irin Glas gant Roman HUON, zo anezhi ur gwir berlezenn, disi flour, lugernus, klok. Kemend-all a gened zo krouet dre ur stumm kaer o klotañ gant un danvez a vefed techet da envel baradozek.

Al lec'h ma tremen nozvezh Siculder an noz ned eo ket ul lec'h boutin ha divlaz; ur gweledva ez eo kentoc'h, leun a gened e kement korn a c'haller gwelout: an ti zo brav, liv ar raz en golo a hañval peoc'hus; ul liorz en em astenn dirak an ti-se, ha da bep prantad eus an nozvezh e vez meneg-et un elfenn eus al liorz-se a hañval gwareziñ an ti hag an dud, o zroc'hañ diouzh bed ar re all: ar c'hamelia a vez damwelet en noz sklaer; c'hwezh ar rezeda a zeu en ti; hag evit gouzout an eur, n'eus ket ezhomm en ti eus un eurier boutin: gouzout a reer ez eo diwezhat pa na vez ket sklarijenn-et ken gant ruz an heol ar c'hamelia a zo e korn ar c'harrdi.

Un tammig bravantez ha barzhoniezh zo lakaet e pep lec'h. Fellout a ra d'ar skrivagner gwelout kened nemetken. Anat ez eo pa gomz eus gouleier an tiez bras; aes a-walc'h e vije bet aze tagañ an tiez-se; met ar skrivagner a gav gwelloc'h keñveriañ o gouleier gant gouleier a-us d'ar mor. En oabl zoken ez eus stered en nozvezh-se, hag ar Werelaouen a lugern. Ha nepell emañ ar mor hag an tour-tan.

An amzer ivez a glot gant ar gweledva brav-se. An noz zo peoc'hus, hag he sioulder zo diskouezet div wech: ne vez klevet nemet an trouz, dister a-walc'h koulskoude, graet gant ar skrilhed; kleier un iliz, tri c'hilometr pell-oc'h, a son sklaer-tre betek al liorz.

Ar pezh a ra an div dudenn en deus ivez ur blaz a blij-adur hag a gened: pourmen a reont el liorz dindan an oabl steredennet; ober a reont un tan brav er siminal, selaou a reont ur bladenn dispar gant violoñsoù fromus, ha dreist-holl, a-us d'an holl draoù-se, en em garout a reont; ar garantez-se a daol war gement tra meneget a-raok ur goulou glan ha dibar. An eñverenoù yaouankiz ivez a zeu daglokaat an dra-se, eñverenoù brav evel just, evit Yann da nebeutañ.

Brav-tre eo pep tra, techet e vefen zoken da soñjal re vray; ezhomm a vefe eus un tammig avel, eus ur c'horn un tammig divalav. Pe, da nebeutañ, e c'haller soñjal e vije bet a-walc'h evit daou zen en em gar pourmen el liorz sioul, pe sellout ouzh an tan, pe selaou ur bladenn, an eil tra pe egile, ket pep tra war un dro.

An tudennoù ivez zo bravoc'h eget boaz. Ned eo ket Yann ha Katell evel bemdez. Hañvalout a ra o deus prientet an nozvezh-se evit ma vefe bravoc'h eget ar re all. Katell he deus lakaet he sae vrayañ hag he botoù bravañ, peogwir e plijont da Yann.

Joëlle Kermoad

An aergelc'h ned eo ket an hini voas, peogwir en em santont e vakañsoù, mare disheñvel diouzh ar vuhez wirion, argaset dioutañ pep trubuilh.

Kerzhout a reont el liorz evel bugale pe evel amourouzon, met n'int ket bugale, ha ne c'hellont ket bezañ amourouzon nemetken.

Evit bevañ an nozvezh et, evit buhezañ un nozvezh dibar o deus kemeret ar pep bravañ enno, ar pep yaouankañ, ar pep skañvañ, evel ma ne welont eus ar gweledva nemet ar pezh a zo leun a gened.

Ur bed brav o deus krouet aze, n'eus netra o tisklotañ, o feukiñ; n'eus netra a c'hell o gloazañ; anavezout a reont pep tra: an doare m'eo sklerijennet ar gambr, trouz ar balmezenn o fiñval gant an avel, stlakaadennoù an amezion o tistreiañ, trouz an tren o vuanaat nepell diouzh o zi. Un doare repu ez eo. Met daoust d'he bravantez, ha marteze en abeg d'he bravantez, e hañval an nozvezh bezañ un dra na c'hell ket padout, ur mare benniget e-kreiz ar vuhez pemdeziek, ar vuhez wirion gant an trubuilhoù, an amzer fall, ar bleunioù goeñvet hag ar botoù seulioù izel. Yann ne hañval ket mervout an dra-se, met Katell a skrij a-w-choù, ezhomm he deus eus an tan a domm hag a vev dirazi, aon he deus eus un trouzig, ne c'hell ket stammañ. Ne c'hell ket disoñjal ar bed tro-dro dezhi, ha ne hañval ket soñjal, evel Yann, ez eo an nozvezh-se peurbadus. Ezhomm he deus lavarout, o ti hec'h-unan, ez int mat hag e c'hellont en em garout; Yann, eñ, a hañval buhezañ se hep soñjal: eürusoc'h ez eo.

Ur gontadenn vray-tre ez eo Sioulder an noz, dibar en Trin Glas dre an aergelc'h a santer enni. Bresk e hañval en abeg d'he c'hened, rak santout a reer ne c'hell ket aergelc'h an nozvezh-se bezañ astennet d'ur vuhez a-bezh. Gallout a reer ivez gwelout er gontadenn-mañ un heklev eus ar bloavezhioù pemont, ma oa al lennegezh ur repu.

Joëlle Kermoad

ANNON

Koumanant 12 niverenn..... 45 FF.
Koumanant d'ar Geriadur Istorel
hepken (4 niverenn) 15 FF.
Koumanant hep ar Geriadur Istorel..... 30 FF.

Rener : G.ETIENNE

Embannerez : P.MAZE

Sekretouriezh : Preder, 30 Place des Lices, 35 Rennes

An arc'hant da: M. G.ETIENNE,

CCP 16 093 13, Paris.

Trede Trimiziad 1970

Priz ar c'haler-mañ 5 FF.

Moulet gant CADED
CPPP N° 35.709

Disleriet hervez lezenn, Trede Trimiziad 1970



